

Gwerz war Skwer fall Skôl gristen Begard

(Ton a gerfot)

3^e Edition

Prix : 1 franc

1

Euzi 'ran, ma c'henvrôiz, pa deuan da boeza
An traou mezuz tremenet en ho toez wit ar bloa,
Ebarz en eur skôl gristen, hanvet Skôl Sant-Bernard,
Savet gant hor bêleyen stog en bourk koant Begard :

2

Di, kalz a dud diwar dro 'gasse ho bugale,
Ewit ma vijent disket barz en doujanz Doue ;
Met allaz ! ar braz oute 'zo bed aman trômpet,
Ho faotret gant hô mistri 'zo bed dê labezet :

3

Eun darn oute koeet klanv gant eur c'hlenvet mezuz
Deuz renket anzaou gant poan techou an dud euzuz !
Pere deue d'o chacha aliez a goste,
N'eur rei dê forz madigou wit dont a benn oute.

4

Kement-man 'bade pell-zo, heb na krabestr na stur,
En skôl an Aotro Doue gant beleyen udur ;
Met an doktor-medesin 'vel ma neuz gouvezet
A neuz laket eun harz krenn d'ho zechou miliget :

5

War he desteni gwirion an daou muian kabluz
A zo bed prim destumet ; e m'aint breman en kuz
Ebarz en prizon Gwengamp, da c'hortoz 'voint barnet
Gant Jureet Sant-Briek, evel ma z'ëo gleet.

6

Ar c'henta, belek Lescoat, n'eo ar gark hùella ;
Dezan evel penn rener an holl 'renke plega ;
He zever a oa gouarn mad he gentseurtet all,
Ha setu c'hen ar c'henta o tiskwel dê skwer fall.

7

An eïl, he gure Mottais, a oa eur paotr dustu ;
Kredabl 'oa trec'h-par dezan en hent frank ar vertu,
Hag ewit harz na vije he *labour* diskuillet,
E zê bed kasset pelloc'h, heb beza trubuillet.

8

Kaeroc'h, an eskop Serrand, goude goud mad an dro,
A lakaez kass anezan da Niss, pell deuz he vro ;
Duhont stog en Itali, 'lêc'h 'oa aezet dezan
Skampa kwit 'raog ar Justis, ma teuche bec'h warnan ?

Duze c'hoaz en tal Vitre 'zo kempennet daou all :
 Paotret vrao ar skôl gristen a lak an traou en brall ;
 Unan, he hano *Recan*, 'neuz saotret ha louzet
 Ugent benag, 'pad dek vloaz, paotret ha paotrezet !

10

Ogen, person mad Erbree 'ziskuillaez kement-man,
 C'hoëc'h gwech ! met eskop Roazon na respont tam
 En pep lëch al loustoni 've leusket da vale, [dezan:
 Aliez gant gwiëgez kerent ar vugale !

11

Ped all c'hoaz ? a n'ouzer ked, a gerz war ho roujou ?
 Hep komz deuz falz-pastoret a goll hor parojou,
 Hag a ve tawet warne, beteg gant ar re vad,
 Pere, bec'hiet gant ar vez, a zerr ho daoulagad.

12

Dê, kement koss digare 'zo mad de n'em c'holo,
 Ha da dreï an traou en gin, gant ho bern koss kojo ;
 Ar bêlek n'eo brazet merc'h he c'hoar brob aman,
 Oa kaset 'mesk ar re zod, wit n'em dizam outan.

13

Pa oan dirak Noumea, vagmaestr war an « Dives »,
 M'oa gwelet ar Penn-rener deuz fraeret Montroulez
 En mesk ar galeourien, wit ar memeuz si fall ;
 Daoust a pigoulz' vo mouget en ho c'hreiz an tan-gwall ?

14

Penaoz na ve ked gôret an tech louz en ho goad ?
 Paotret lard ha dizoursi ; mann d'ober, met cher vad ;
 Ma vije red dê poania da zével bugale
 E c'haeche diotachou prim ha prim digante.

15

Gwelit eta, tudou kaez, a beurz an dud a fe
 Pegement a draou kuzet en mesk ar fall-nte ?
 Renkout n'em c'holo bep taol, ha koach ar re wasan,
 E lëc'h diskuill aneze da Justis ar bed-män.

16

Ouspen, ho c'hazëtenno deuz rôet peoc'h warne
 Beteg ma zint bed forset d'anrao ar wirione ;
 Rag d'eur c'hlerikal, kredabl, kement-man n'ëo netra ?
 Pa neuz en hano Doue ar galoud d'om zrompla !

17

Unan ar re-man 'lare penaoz skôl Sant-Bernard
 N'ëo tam wasoc'h ewit se, gant he mistri dispar (!)...
 Daoust petra 'vo red ober en toul-ze 'benn warc'hoaz ?
 Ewit ma vezo brudet dre holl kalz lousoc'h c'hoaz (!?)

Koulskoude teod ar re-man, dreist holl hini Corfec,
 Vel ma fazi eur paour-kaez, o de mall da brezek
 Wit er laket en pillou ma ve ked deuz ho zud ;
 Met breman 'chomont gwell zioul ha pinous war ho

19

[c'h lud !

Ze harzo nê eun tamik da bigosad bemde
 War skôliou fall an diaoul (!) hag ar skôl dizoue (!)
 Kalz oute 'wel eur blouzen en lagad pep skôlaer ;
 Met na welont ked an treust a greuw hini ar fraer.

20

Ho doue nê ked henvel deuz hini ar re all,
 Benn ma laez he ziskibienn da rei demp ar skwer fall ;
 An hini gwella neuze 'so gant hom skôlaerien,
 Pere 'deuz mann da ziski gant paotret an tû gwen.

21

Doue, p'hini 'zo dre holl, c'ha da c'heul ar furnez ;
 Met an diaoul, ar paotr fin, 've d'he c'heul aliez,
 Hag o tremen 'biou Begard newa trec'het war-n-Han ?
 En pad ma oa o trinka gant Corfec ha Serrand !

22

Met leuskomp anê breman da c'hoari mouchik dall
 Ha kesomp hor bugale pell deuz ar skweriou fall,
 Da skôl ar Gouarnamant, gant hom gwir skôlaerien
 En tâl pere pep bugel hell bale sonn he benn !

23

Petra deuio da veza ar vugale 'vo bed
 Pistrïet en oad kenta, a gorff hag a speret ?...
 Tadou ha mamou kristen, sonjit en kement-man ?
 Ha diwallit ho pugel deuz kleivet ar chass-klanv.

24

Harzomp ar bed da goea er poul 'vel en Begard,
 Pe 'vo gwasoc'h wit loenet an dud war an douar ;
 Harzomp na goefe warnomp ar brasa dizenor !
 O veza zuillet ive 'vel Sodom ha Gomor !

25

Me c'houlenn wit êchûi, deoc'h beleyen hor bro
 An droejou da zemezi, ma yêl an traou en dro ;
 Goude brezel ken garo 'z 'euz ezomp tud a leiz,
 Neuze c'hwi 'vo direbech, m'ar grit enor da Vreiz.

26

Fell ked din droug-komz aman deuz ar bastoret vad,
 Ve goaz atao deuz ar re 'ra dizmeganz d'ho grad :
 N'heb a neuz eur gwir gundu ebarz en he greden
 Zo pec'het noazout dezan, na klask dont d'en dispen.

Rag me oar peud eur gwell garg pa refot ho tever,
 O rei skwer vad da genta d'an holl en pep amzer ;
 Met daoust penaoz ve posubl demp-ni c'heuil ho lezen,
 Ma veoc'h dalc'hmad o fazi, hag er maez ar reolien ?

28

Kement neuz gret ar c'Hrouer a lerit 'so gret mad :
 Perag-ta klask stourm outan, trei diwar ar gwir stad ?
 O nac'h an nerz neuz rôet d'he holl graouadurien
 E nac'hit ive da c'heul he c'hallout penn-da-benn.

29

Biskoaz Doue 'neuz laret neblêc'h barz er skritur
 D'an den kaez chom he hunan wit beza mad ha fur ;
 Ar c'hontrol a renk ober a benn c'heuil he lavar,
 He c'hourc'hemen eo « Kresket ha leuniet an Douar. »

30

Kaera tra 'm 'eump deuz he beurz eo merk ar garante !
 Ar c'hrenva dalc'h d'ar goazet, eo greg ha bugale ;
 Hag an n'heb a glask distrei diwar eun hent ken kaer !
 A nac'h genet ha furnez, zo den losk ha dister.

31

Sellit diwar mene Bre, na brava taol-lagad,
 Parojou kaer tro war dro, deuz ar Mor d'an Argoat,
 Lêch a zo leun a vûe, merc'het koant o virvi,
 N'eur bedi Doue bemde, gant ar c'hoant dimezi.

32

C'hwi 'oar, eur wech dimezet, ne vaer ken ker diroll ;
 M'ar grit, c'hwi vezo douget, a greiz m'oc'h en argoll ;
 Pell ouzin-ta c'hoantad deoc'h mennad sant Olier,
 A b'hini 've ked komzet nemet gant Pipi Gouer.

33

Poezit komjou fur Paskal, p'hini deoc'h a lare :
 « An *Den* na nê ked eun *Ael*, na loen nê ked ive ;
 « Met an *Den* a glask diskwel eo eun *Ael* er bed-man,
 « (*Wit merka he zantelez*), c'ha da *Loen* peurwian. »

34

Gwelit-ta pegen diez eo harz ar wirione
 Da drec'hi war ar geoyer ha berniou faosente :
 An *Den* a vezo barnet dre holl deuz ma raïo ;
 Bevomp-ta gant honestis evit enor hom Bro !

Ch. ROLLAND,

Conseiller municipal, Délégué cantonal,
 à GUERLESQUIN (Finistère).